

CANTIC SPIRITUEL

Var sujet ar Mission so digoret ^{er bloaz 1786,} e parres
 Pluguan var dro ul leo dious ar guer
 a Quemper : Var Ton Guers Sant
 Corintin.

ROet din, var Jesus biniguet,
 Ur speret douç, humbl ha parfet,
 Da ober ur C'hantic Breton,
 D'ar bopl evit ar Mission.

Un tensor a graçou Doue
 Hon deus en Elcopty Queine,
 Ebars e parres Pluguan
 E caffor an tensor-se breman.

Hor Beleyen hac hor Pastor
 Inspiret gat hor Redemtor,
 O deus gret dre o madeles
 Digaç Mission en hor parres.

C'hui oll pec'herien caledet,
 A so pell so en ho pec'het,
 Deat oll bremâ da Pluguan,
 Enno e recevot remission buan.

Ploneisis hac Quemperis,
 Penarsis hac Plogastellis,
 Deut oll amâ d'ar Mission,
 Digoret eo en ho Canton.

En no ty, Sant Cuffan biniguet,

Ema ar fourcen digoret,
 Evit guele'hi hon eneou
 Souillet dre cals a bec'hejou.

Ar Gador a vo arrosfet
 O rei ar bresel d'ar pec'het
 A zalc'he pell so hon eneou,
 Siouaz ! en danger ar maro.

Tadou Santel a bep coste
 So deut dre graç Doue
 Da digueri deomp ar fourcen
 Deneus an dour a binigen.

An Ærouant a so facher,
 An Æles so rejouisset,
 O velet an tensor leun a graç
 Digoret deomp e Lamgroas.

En ur Chapel nevez savët
 Dre visou hor Pastor biniguet
 Pehini evit renta gloar da Zoue,
 En deus consacret e oll danve.

Mar hoc'h eus dre ar pec'het marvel
 Bet collet graçou hor Salver,
 Deut oll bremâ d'ar Mission,
 Gant graç Doue ho po pardon.

Ar yaouanca so er parres
 Ne quet fur da velet james
 Ur sort tensor en o C'hontre,
 Saveteomp dreizan hon ene.

Tud orgouillus hac arrogant,
 Tud avaricius ha mechant,

Tud luxurius hac a avi,
Deut bremâ d'en em savetei.

Tud gourmant ha tud colerus,
Ha c'hui ivez tud diegus,
Deut oll da velc'hi hoc'h ene
Er sourcen an dour a vuhe.

Seiz laç eus an Drouc-Speret
A zalc'h hoc'h ene chadennet,
Seiz graç eus ar Mission
A burifio ho calon.

Conferançou ha Sermoniou,
Ha pep sort Instructionou
A ra an Tadou er Mission,
Clevomp-y a greis hor c'halon.

Pa zui ar Mission da finissa,
Hac an Tadou da guimiada,
E vezimp divezat neuse,
Savateomp bremâ hon ene.

An Tadou eus ar Mission
A laca poan e peb façon
Evit instrui ar pec'herien,
D'o lacat d'ober pinigen.

Hon Doue leun a vajeſte,
O velet fouillet hon ene,
A zigaç Beleyen ſantel
Da rei deomp graçou eternal.

Bete gant ar vugaligou
E laca o foan an Tadou,
E lacaint dre graç ar Mission

Jesus da antren en ho c'halon.

Ar C'hatechis a vezo bemde
Evit instrui ar vugale,

Ha dre ar c'han ar C'hanticou
E tenerraint ho c'halonou.

E pep façon, pec'herien quæs,
An Tadou o deus madelez

Evit savetei hon ene,
Ma vo agreabl da Zoue.

Hac e ve hon ene caledet
Evel houarn pe dir trempet,

E vo rentet meurber tener
Gat Goat Jesus-Christ hor Salver.

Ma Breudeur Christen, me ho ped,
List oll afferou eus ar bed,
Ha deut bremâ d'ar Mission
Da roi da Zoue ho calon.

Ne glasquit quet a quission,
Deut oll bremâ d'ar Mission;
Rac an affer necessera
Eo hon ene purifia.

Tadou ha Mamou, ordrenet
D'ho pugale ha d'ho domestiquet
D'ar Mission oll da zonet,
Pe gat Doue e viot blamet.

List an afferou temporel
Da honit ar re eternal,
Pa en deus Doue ar vadelez
Da seller ouzomp a druez.

Pa vo hon ene purifiet ,
Chasseet diouzomp ar pec'het ,
Tachomp oll da berseveri ,
Birviquen dezan na zistroomp mui.

Mar deu deomp dentation ,
Sonjomp e graç ar Mission ,
Hac en oll fatig an Tadou ,
Hac en o Instructionou.

An Drouc-Speret o veza facher
O velet hon eneou guelc'het ,
A lacai e boan d'o souilla ,
Evit ma tistroimp daventa.

Quemeromp courach , Christenien ,
Ha greomp erfat hor pinigen ;
Sonjomp alies en hor c'halon
Eus oll graçou ar Mission.

Tad Eternel , ni ho suppli ,
Roet deomp graç da berseveri
Er pez hon deus bremâ clever ,
Ma zaimp d'an Eèn d'ho cuelet. FIN.



CANTIC VAR C'HIMIAT

*eus ar Mission , hac evit adori ar Groas.
Voar Ton , Ma Breudeur Christen.*

A Llas ! allas ! Tadou Santel ,
Didostaat a ra an amser

Ma finisso ar Mission,
 Pebes glac'har en hor c'halon!
 Goude ar boan hoc'h eus laqueet
 Evit rei bresel d'ar pec'het.
 E teut bremâ d'hor c'huitaar,
 Houmâ so deomp-ni calonat!

Hon ene bremâ so neteet,
 Chasseet diouzomp ar pec'het:
 Mæs allas! bea hon deus aon bras
 Ne zeuffemp d'e cometi c'hoas.

Tadou Santel, quent quimiada,
 Leset gueneomp da viana
 Ur sin bennac en hor C'hanton
 Eus a graçou ar Mission.

Pa hoc'h eus quement a boan laqueet
 Var ho corf ha var ho speret
 Evit disquez deomp hent an Eê,
 Ha pidi evidomp hon Doue.

Ah! Confessoret biniguet,
 P'eur ec'hallimp-ni ho guelet?
 Ha-ni hor bezo biquen ar c'hraç
 Da velet hor C'honfessoret c'huas?

Pa hoc'h eus bet ar garante
 Da ziliama hon ene,
 Leset ganeomp ur merc bennac
 Eus a graçou Jesus hon Tat.

Ma bugale, pe sort Bouquet
 A goulennet evit ho Retret?
 Dre ho pec'nejou quer garo

Hoc'h eus laqueet Jesus d'ar maro.

Evelse ræsonapla tra

A gavomp-ni quent quimiada ,

Eo e lacat deoc'h ous ar Groas ,

Ma chommot ato en e c'hraç.

Ya , oll dut ar Mission ,

Chetu amâ an donæson

A lesomp ganeoc'h quent quimiada ,

Laqueet ho confianç enna.

Chetu ar Mæstr Missioner ,

Chetu Jesus-Christ ho Salver ,

Digor evidoc'h e galon ,

Deut oll d'e clevet o sermon.

Eus ar Groas caër staguet ,

Toft d'ar Langroas nevez savet

ema Bouquet ar Mission ,

Deut oll d'e adori a galon.

Na passeet jamæs ar Groas-mâ ,

Hep lavaret da viana :

Me ho salud , Salver ar bet ,

A so ous ar Groas-se staguet.

Tud paour ha tud affliget ,

Tud gant nec'hamanchou mantret ,

Deut da gaout Croas ar Mission ,

Hac ho pezo consolation.

Intanvezet , Orphelinet ,

Tud gant goall procesou nec'het ,

Quemerit Jesus da Alvocad ,

Hac ho pezo ficour timat.

Martolodet var ar mor bras,
 Pa viot o tremen bec ar Ras,
 Songet er Groas biniguet
 A so e Pluguan savet.

Ploveuris ha Pontnabadis,
 Ploneouris ha Lanvernis,
 Pa zeuot da Guemper d'ar Marc'hajou
 Eet da adori Croas Jesus hon Autrou.

Ma breudeur ha ma c'hoareset,
 Quement a so bet er Retret,
 Ho pezet sonch en ho calon
 Eus oll Tadou ar Mission.

Ha pa vezimp-ni en Ilis
 Oc'h offr da Zoue ar Sacrific,
 Ni bedo evidoc'h ive,
 Ma zaimp oll da velet Doue.

Douguet Imach ar Crucifi,
 Da enori ar pemp Gouli,
 Chetu hor souhet deis ha nos,
 Quenavezo er Barados.

F I N.

GRÊT ER BLOAS 1786.